

~~diff. de l'original~~**CANTIC**

VAR SUJET

**AR BURETE***Var eun Ton neve*

Chelaouet oll, tud yaouanq, eur guelenadurez  
 A so meurbet profitabl evit ho silvidiguez,  
 Da viret ar Burete evel ma zeo dleet,  
 Da Jesus guir Vab Doue, Pried ar Guerc'heset.

Kals a glevo ar Vers-mâ, hag a vezo fachel,  
 Balamour d'ar virionez so enni diskleriet :  
 An den klan e daoulagat na ell quet sellet an de,  
 Nac ar re a zo coupabl, klevet ar virione.

Ar sujet eus ar Vers-mâ eo ar fragilite  
 Demeus ar merc het yaouanq re skan a volonté,  
 Allas e veler gante alies glac'haret,  
 O zadou hag o mamou goude o beza maguet !

A re a zo vertuus n'en em offençont quet  
 Evit laret ar virione d'ar re a zo imparfait,  
 Doue a gommand quelen ar re obuissant,  
 Ha rei an diseñor d'ar re so variant.

Allas ! ma idi an amzer ma voa ar merc'het kontant  
 Da exposi ho c'horvou d'ar maro, d'an tourmant,  
 Guel vise gante beza losquet ha mezeriet,  
 Quent evit e nep fæson offançi o guerc'hdet.

Pa annonças Gabriel d'ar Verc'hes Glorius  
 E oa choaset gant Doue da vezan Mam Jesus,  
 Ez eyas en em excus, lavrret na vise quet  
 Mar bise dre ann dra-se offançet he guerc'hdet.

N'en deus tra voar an douar a ve a vrasoc'h pris,  
 Ma caremp consideri, evit ann honestis ;  
 Ann oll aour an oll arc'hant hac ar mein precius,  
 E comparæson dezi a so traou disprisus.

Pa ve collet ann arc'hant hac ive al leve,  
 Gant poap a so moyen d'o ganit adarre :  
 Mæs mar collit ho c'henor, ha fallou e recour,  
 Quement den a so er-bet n'allont quet ho sicour.

Enor ar merc'het yaouanc so evel eur veren,  
A so facil da derri, pe evel paper guen,  
Pehini gant eur bluen goude beza scrivet,  
Evit poania e velc'hi jamæs na ve grêt net.

Greomp c'hoas eur comparæson eus ar fourdilisen  
Hac an tensor precius, enor ar fumelen ;  
Ar fourdilis so brillant pa zeuer d'o sellet,  
Mar o touchet gant ar bis, he collont ho guenet.

Allas ! sivoas, tut yaouanc, pa brometer deze  
Kompsiou kær, fidelite, ha beq seurt karantez,  
A zeu facil da gredi quen a vezint tromplet,  
Ha goude epad ho buez e chomont glac'haret.

Lucifer a bromette da Eva ha da Adam,  
Evit dibri eus ar frouez n'o divise nep blam,  
Allas ! hac e voant tromplet : hac evelse brema  
E tromplet o bugale dre lies promessa.

Allas ! gant an den yaouanc so preis d'ann az raouent  
Goude glac'hari o zat, o mam hac o c'henrent,  
Pa na gueront conservi dreist pep tra oc'h enor,  
A so cals preciusoc'h evit cant mill tensor.

Allas ! ann tad hac ar vam a vo ive daonet  
Abalameur d'o bugale, pa n'o corrigeont quet  
Evel an douçder a frouez a reputer d ar guez,  
Eo d'ann tad a d'ar vam buez ar vugale.

Ar blanten, pa ve yaouanc, a bleg gant pep avel  
Evit he derc'hel eün, e zeo ret he sevel ;  
Evelse ar vugule, ma na vent corriget,  
A blego dindan ar bec'h ann natur corrompet.

Rac-se, tadou ha mamou, pa ho c'heus bugale,  
Mar fell dezoc'h beza divlam abalamour deze,  
Na lesit-y quet da vonet da nep seurt assemble  
Na vo unan ac'hanoc'h, pe o c'herent gante.

N'en deus den var ann douar a nep so qualite,  
Ma na gar laquat evez. na gollo e ene  
Liessoc'h ann drouc speret a so o tarnigeal,  
Evit a so quellien voar dro an aneval.

N'en deus na foar na marc'hat, pardon na nep andret  
N'en em gaff ha Lucifer hac he gamaradet,

Eguis bleizi arraget pere a so subtil  
Da drompla ann dud yaouanc pere a so fragil.

O lesel ann dud yaouanc re en o liberte,  
Eus o mesur discredet gant re a vanite,  
E roer sujet deze d'en em rei d'ar pec'het.  
Difficil eo en em viret pa vezer commancet.

Ar Roue ann oll furnez en deveus lavaret  
Nep a gare bugale a vezo glac'haret ;  
Rac deiz ar Varn general hep mar o devo blam,  
Pa rei bugale daounet mallos dan tad ha mam.

Me ho consail, tud yaouanc, da viret chastete,  
Evit renfa Jesus-Christ amoureux hoc'h ene ;  
En em gonsacret dezà hac e vihèt eürus,  
Biscoas ne voa servicher ha quer carantezus.

Jacob evit eureugi merc'h ann ingrat Laban,  
A chomas abet seiz bloaz e fatig hac e poan,  
Jesus so deut er bet-man da eureugi eur vestrez,  
En deus balamour dezi finisset e vuhez.

Satan clan hac anvius o velet omp choaset  
Da possedi ar plaç caër en neus dre gloar collet,  
Ma gall hon laquaï da goll eun tensor precius,  
Evit ma facho ouzimp hon Redemptor Jesus.

Mar fell deoc'h beza divlam, ne em quevet bepret,  
Ann eil sex gant eguile assemblez da brezec,  
Rac an occasionou a so re dangerus ;  
Nep en deus he approuvet a so bet maleurus.

Nouffe den touchal peg na vo e zaouarn souillet,  
Na querzet voar glaou tan na vo e dreid poaset ;  
Evêlse ann dud yaouanc ann eil gant eguile,  
Pa vent Sant ha Santeset, e offaçont Doue.

Den n'en deus ar furnez en devoa Salomon,  
Nag ive quement a nerz evel en devoa Samson.  
Evit o nerz, o furnez, e zint e n'em gollet ;  
Nep na gred ar virione, a velo dre effet.

Elec'h laquat ho corfou e fatic hac e poan,  
Ma chommit hep exercis, e arruo Satan  
Da invita, da laquat traou sot en hon calon,  
Ar guir voyen da drehi eo Yun hac Oræson.

Mari Egyptianez ha Mari-Madelen ;

A gonduas eur poulsal eur vuez disordren,  
Ha pandevert ar gasti a rezont d ho c'horfou,  
A ven brêmâ o lisquis e creis an ifernou.

Pa voa an Autrou Sant-Anton ebars en ermitach  
O combati ouz Satan ouâ leun a arrach,  
Pa oa en e Oraeson, e save avechou  
Evit ober exercis, rei a gort d'ar poaniou.

Pa en em gueb daou den yaouanc an eil gant eguile,  
Songeomp emedi Doue presant en o ene ;  
Merqua a ra an oll œuvrou, comsou, songesonou,  
Voar ben ma zaïnt dirazâ da renta o c'honchou.

Songeomp ouспен er stravill a vezo o clevet  
Mouez trompillou ann Ælez, pa finisso ar bet,  
O soumetti peb-unan d en em gavout presant ;  
Den ne allo bea exant evit aour nag arc'hant.

Petra raï ar pec'herien pa vezo digoret  
Al leor deus o c'honstianç o devezo scifet ;  
Pa vezo gret hor setanç divezat vo gouela,  
Divezat vezo neuze fallout he c'horrigea.

Mar deu goal sonch er galon, goulennit diouthi  
Goude plijadur ar bed hag hi a allo souffri  
Ann tan grevus en ifern, pa ne allont aman  
Anduri voar hor c'hioc hen eur fulennic bihan.

Un Ermit sollicitet da eur pec'het disonest  
Gant eur fumelen mechant, en em divisquas prest,  
Hac en em strinquas en tan, o lavaret dezi,  
Approuvomp e recompans quent monet da bec'hi.

Erfin lequet evez mat ous ho santimanhou,  
Ho pemp squiant naturel ; a re-se o tougo,  
Ma na gueret divoal pir, da souilla hoc h ene,  
Evel ma eure David goechal gant Betsabe.

Queit ha ma oump er bet ma oump e danger bepret.  
Abalamour d'hon natur so douget d'ar pec'het ;  
Ar gombad a so livret etre Satan ha ni.  
Ret eo domp caout courach, mar tell dimp e trec'hi.

Petra sonch ar bec'herien, evit daou na tri de  
O deus da chom er bed-ma, coll an Eternite,

Hag y o c'hallout bezan ene hag corf contant  
Er Barados birviquen hep annui na tourmant.

Clevet o c'heus ar voyen, mar quirit he miret,  
Evit en em brepari da caout da briet  
Jesus, mar en desiret, ma na illit gortos,  
Er Sacramant an Auter e queffot o repos.

FIN.

---

## CANTIC SANTES AGNES

3/1 bis

**Patronez ar Merc'hed Yaouanq**

Var ton : *Sacris Solemniis.*

Entrezoc'h, tud yaouanq a gar ar burete, — 12  
Ar vertuz angelic a blich calz da Zoue,  
Clévit cana 'r vuez eus a Zantez Agnez  
En despet da Zatan a zo maro guerc'hez

Demeus ar guêr a Rom e voe hi guindic ;  
He zad, he mam a voa ha nobl ha pinvidic ;  
Hoguen o merc'h Agnes na estime netra  
Nemet Passion Jesus ha dont d'en imita.

Evel ma comançes da anaout eun Doue,  
Dezan prest ec h offras he c'horf hac he ene,  
Ha dont da ober vœu eus a virginite,  
Evit e servicha fideloc'h goude ze.

En oad a zaouzec vloa e fell d'an drouc-speret  
E quittaje he vœu ha qemeret priet,  
Quittat he devotion, heuil maxinou ar bed,  
Evel ma voa ar c'his eus an demezelet

Un dijentil yaouanq a voa mab d'ar prefet,  
O veza bet charmet o velet he guenet,  
E creiz ar ru er Rom, Agnes a racontras,  
Hac evit e fried dezi en em offras.

Agnes ous e glêvet a gommans da grenna,  
Hac evel diouz eun aër a dec has diouta :  
Eteo eus an ifern ! pella prest, emezi,  
Cavet meus eur pried hervez va fantazi,

Birviquen em buez dezan ne fazian,  
Rac eus ar priedou ez eo en ar goellan ;  
Beza eo pinvidic, nobl, mad, pur a parfet,  
E dad eo va Doue, hac en Salver ar bed.

P'oe goelet ar gourach eus ar Verc'hes Agnès,  
E voe prest accuzez da veza Christenez,  
Da veza sorcerez, eun demezel mechant,  
Hac e verite souffr peb poan ha bep tourmant.

Ar prefet e galvas hac e fedas meurbet :  
Agnes, va mab Sympron qemerit da bried,  
P'otramant d'al lec'h all e viot conduet,  
Hac eno dirac oll e collot ho guerc'hdet.

En noas a ben-da-ben e viot divisqet,  
Hac er stad ze dre Rom e viot conduet,  
Ha goude d'peb lec'h fall etouez ar galantet  
El lec'h na guesot sicour, pa viot erruet.

Ar Santez, hep sponta, a respontaz dezan :  
Da Jesus, va guir bried, biqen ne fazian ;  
Roet en deus eun Æl evit va frezervi  
Diouzoc'h ha diouz qement a zeui d'am attaqi.

Neuze ar barner infam Agnes e gondaonas  
Da veza divisqet ha conduet en noas  
E Rom dre ar ruyou hac ac hano casset  
D'al lec'h fall, etouez tud brutal vel bouc'hetr.

Mæs Jesus, he fried, souden a bermettas  
Ma cresqas pront he bleo, pere he goloas,  
Bete ma voe casset d'ar zal a insamite,  
En esper coll he enor hac e virginite.

Pa voe destumet eno evit coll he enor,  
Pini a estime mui eguet mil tenzor,  
Eun habit guen a gavas evit en em visqa,  
Hac eun Æl en c'hichen evit e delivra.

Ractal var he daoulin Agnes en em stringas,  
Ha Jesus he fried, a galon a bedas  
Da gonserv e enor, permetti ma varvje  
Quent eguet offançi biquen he furete.

Pa oa Agnes guella oc'h ober orêzon,  
Ec'h antre libertinet brutal ha dirêzon

Da zonjal ober d'ei coll he virginite  
Ha consanti gante d'o oll brutalite.

Mæs pa veljont ar zal carguet a sclerijen.  
Agnes var he daoulin, an Æl e ne c'hichen,  
E conejont d'an daoulin da c'houlenn oll pardon  
Ouz Douc hac Agnès eus a greiz o c'halon,  
Evel ma voant sortiet en eur veuli Doue,  
En eus goves o faut hac o zemerite,  
An dijintil yaouanq Symphron a antreas,  
Ha violi Agnez soudan a brederas.

Mæs d'an neb zo fidel. Doue ne vanq james,  
Rac se e conservas e vir servicheres;  
E qichen he zreid an Æl an discaras,  
Hac eno var ar plaç maro mic er mougas,

Pa glevas ar Prefet e voa e vab mouguet,  
Gant eur goler horrupl e teu en eur redet  
D'ar zal da gaout Agnez, o crial aboes pen :  
O sorcerez miliguet ! ô qef eus an ifern !

Perac ec'h eus tu lazet va mab muia-carez,  
Hep cavet d'e ligne na dezan nep respet ?  
Salocroas, eme Agnes, ne meus en quet lazet ;  
E vrutalite infam en deveus e gollet.

Ar prefet digoleret, Agnes a supplias,  
Ressucitit va mab, ma ellit var ar plaç  
Sortiit eta, emezi, rac ne veritiit q't  
E ve en ho presanq ho mab ressucitet

Incontinent d'an daoulin dirac Jesus, e fried,  
E presant he requet gant comzou calonec .  
Jesus va c'harantez, roit buez, m ho ped,  
D'an dijentil maro da anaout e bec het.

Pa edo guir guella oc'h ober oréson,  
An Æl a ressucitas an dijentil Symphron,  
Pini incontinent ma voe ressucitet,  
A lavaras a grenn adieu da bep pec'het.

Ouz Doue da gnenta e c'houlennas pardon,  
Ha goude ouz Agnes eus a greiz e galon,  
O grial a boes penn ; pardon, va Doue, pardon ;  
Pardon, Agnes ; pardon d'am pec'het dirézon,

Pa velas ar prefet e vab convertisset,  
Gant arrach a condaon Agnes da veza lasquet :  
Pa voa taolet en tan, an tan en em rannas,  
Hac hep touch ouz Agnes cals a dud a lasquas.

Goude voe conduit da veza dibennet :  
Ar bourreo o crena, he sqei ne grede quet ;  
Mes hi ouz e bressi a lavaras dezan :  
Evit Jesus, va fried, mervel a zeziran.

Quen buan ar bourreo, den cruel hac ingrat,  
Gant eun tol coutelassen en beuzas en he goad ;  
Ac'hane gant an Ælez en envou cunduet,  
En oad a drizec vloas da veza curunet.

Souden goude ma voe gorf Agnes interet,  
Ec'h apparis d'e c'herent gant cals a zentezet :  
Bezit fidel, emezi, me a zo curunet  
Gant va fried Jesus etouez ar guerc'hezet ;

Cetu fin eur femelen a gare ar burete,  
Beza bepret en joa en dra bado Doue,  
Gant ar Zent, an Æles, ha gant ar guerc'hezet ;  
Birviquen da james Doue ra vezo meulet.

Petra sonjit pa velit eun dimezel yaouanq  
En oad a drizec vloas o souffri pep tourmant,  
Q'ent egnet m'otreje offranç he furete :  
Mar doc'h fur, grit evelti, ha e goelot en év.

Mar doc'h bete vremen eur Vadalen,  
Elec'h imita Agnes, eur bec'herez monden  
Clenchit grit pinijen ha goulennit pardon,  
Hac e viot pardonnet o c'houlen a galon.

Courach eta, emezi, courach oll dud yaouanq,  
Coulz a Santez Agnes andurit pep tourmant ;  
Combatit bete r maro evit ar burete,  
Hac e viot curunet pa rentot hoc'h ene.

Qemerit Santez Agnez evit advocades,  
Ha sonjit en e buez, pedit hi aliez,  
Hac a vo eur voyen da veva pur ha net,  
Da veza er Barados coulz hac hi curunet.